


D'AR VRETONNET

Tud a Relijion



« Ar c'hlericalet, setu aze ann enebourien !

(Diskour GAMBETTA, 4 a vaë 1877).

Ar c'homzou-ze, lavaret gant Gambetta er Gambr, d'ar 4 a viz maë 1877, ag oberou displeal kals clericalet, o deuz poulzet ac'hanon da glask anavezout petra zo e santiman-tchou beleïen Breiz-Izel. Ar pez a meuz guelelet ag desket enn deuz diskuezet sklear din e z'eo beleïen Breiz ar guir vistri dre ama.

J. M. 1878

Beza z'int kazi oll bugale da bayzantet ignorant, savet er semineriou hervez guizioù ann amzer goz, hep gouzout netra deuz ann amzer hirio, hep gouzout zoken histor guirioù ar vro, dreset hepken da zouja evel tud dall da reglennou ann Iliz. Ne ket estonnuz eta e teufent, goude m'a vent beleguet, da veza ken douguet, evit ar royalistet clerical.

Evit respeti constianz pep hini e renker dispartia ar relijion deuz ar c'hlericalism. Deuz hema hepken e fell deomp komz, rac distrujet enn deuz ar guir relijion, ar relijion goz, ag great anezki eun enebourez d'ar skiant-chou ag d'al liberte.

Guelet a c'hellomp enn eur studia levriou santel penaoz eo deut ar veleien da veza pinvidik. Sant Luc, enn he levri hanvet Oberou ann Ebestel, a gomz evellenn deuz amzer guenta ann Iliz : « Ar gristenien guenta n'ho d'oa nemet « eur galon ag eun eun ene. Hini anezho na gonsidere ar « pez enn d'oa evel he zra particulier ; ann oll draou a « oa boutin etrezho. Ne oa ket a beorien enn ho zouez, « ar re o d'oa danvez, tyez, pe douar, a verze anezho ag a « zigasse ann arc'hant d'ann iskibien ; ann arc'hant-se a « vije distribuet goude da bep hini hervez he ezomm ».

Ar gristenien guenta a zeblant beza bet socialistet. Perac ar veleien hirio na heuliont ket skridou Sant Luc ?

Abalamour m'ho deuz amkounac'heat kelennadurez Jesus-Krist, ag e preferont hirio ar pinvidiguezioù d'ar baourentez.

Ar garantez-se etre ar gristenien guenta a ziminuaz kals goude ar persecutionou. Perac? Abalamour lod anezho, deut da veza pinvidikoc'h, a bellaaz deuz ar re-all, evit jouissa deuz ho danvez. Ann Iliz he hunan, dindan ann impalaër Constantin, a zastumaz tinzorioù, traou prezioù ag ornamentchou kaër. Ann impalaër-ze a roaz da eskop Rom (hirio ar pap) eur palez, hanvet palez Latran : eno m'a ar penn kenta deuz puissanz ar pap.

Neuze e savaz eun tam dissansion etre ar gristenien : lod anezho, pere a felle dezho heullia kentellioù Jesus-Khrist, a n'em dennaz enn dezertchou pe er solitud, a zavaz gouentchou menec'h, pere, direbech d'ann amzer guenta, a zeuaz goude da veza evel ar re-all, da vernia madou var madou ag tenzor var denzor. Etouez ann ermitet brudeta e kounter Sant Anton ag Sant Hilarion.

Goude beza dastumet kals madou, ann Iliz a reaz evel ar bañannet, a zavaz skeudennou d'ar verc'hez ag d'ar zent. Ann dud fidel, touellet gant prinvidiguez skeudennou ar zent, a n'em abituaz da adressi ho fedennou, non paz da Zoue he hunan, mes d'ar skeudennou pe d'ann imachou kaër.

Abalamour da-ze, ann ampereur Leon trede, eur c'hristen koulskoude, a ordrenaz distruja ann oll skeudennou santel, oll imachou ar zent.

Concil Constantinopl, e 754, a gavaz mad ar pez enn d'oa great ann ampereur Leon trede ; mes goude maro henno, ann ampereur nevez, Adrien, a lakeaz concil 787 da gondaoni ar re a zistruje ann imachou santel (Iconoclastes).

Kredennou Leon trede a oa bet kemeret a nevez pell goude gant ar re a hanver enn histor « Albigeois, Hussites et Vaudois » mes ato ann Iliz a gombataz anezho, rac santout a ree penaoz he danvez e vije e danger m'a ia-je d'ann traon ann espeç idolatri e d'oa lvantet.

Hirio c'hoaz, ann imachou santel eo a ra puissanz ar veleñ : imachou ar verc'hez (Lourd ag leac'hall) a zo evitho eur zoursen a binvidiguez, kerkouls ag ar skapulieriou ag ar vedalennou.

Kement-ma zo henvel ouz ar pez a dremen etouez serten sauvajet, da bere serten sorcerien a verz ker imachou pe skeudennou a hanvont grigri enn ho langaj ag da bere e prestont kals vertuziou.

Guelet hor beuz ar gristenien oc'h enn em zispartia e diou loden : mignonnet ar binyidiguez ag mignonnet ar

baourentez. Divezatoc'h meur a zisparti c'hoaz (églises réformées).

Vardro 858, kenta schism, diou Iliz : hini Constantinopl ag hini Rom. Deuz 1378 da 1449, ann Iliz a n'em zispartiaz c'hoaz etre meur a bap pere a renaz er memes amzer ag a oa jalouz braz ann eil deuz eguile, — petra ta !

Ann Iliz catholik romen a guendalc'haz hepken goude ann dissansionou-ze ; beza oa bet ato ar c'hreva,

Goude beza dastumet kals madou, ann Iliz catholik a guntunuaz da n'em anfounsa er gorrupsion : dont a reaz ar veleïen da guemer ann habitud d'ober paea ar zacramantchou ag ar pedennou great enn Iliz. Ato e vijent oc'h enebi ouz ar gouarnamant deuz ho amzer.

E 1119, eur c'honcil assamblet à Rheims, a zifennaz ouz ar gouarnamantchou touch e fesoun ebet ouz madou ann Iliz ; mes difenn a reaz ive ouz ar veleïen tenna profit deuz ar zacramantchou n'ag ar pedennou.

Ag koulskoude e veler hirio ar veleïen oc'h ober paea ker ho fedennou.

Ag koulskoude, leverit din, daoust ag kredi a rit penaoz ar paour keaz den kasset d'ar vered hep pedenn a vo falloc'h diguemeret gant Doue eguet ar pinvidik pehini enn deuz arc'hant da baea pedennou ar veleïen gant ho guiskamantchou kaër alaouret pe arc'hantet ?

Nan, Bretonnet, naroët ket oc'h arc'hant d'ar veleïen, roët anezhan kentoc'h d'ar re deuz ho touez pere n'ho deuz ket a vara da dzribi. Bezit sonj penaoz Jesus-Krist a oa paour.

Ar veleïen a lavaro deoc'h penaoz ar paë a recevont evit offerennoù, interramantchou, etc., a zervij evit antreteni ann ilizou. Eun digarez hepken evit kuzat ho jeu. Ann tad CHOMEL ne ket deuz ann aviz-se; henn a skrive e 1745 d'eur poent e oa ar veleïen puissant : « Ne
« ket eun dra vrag lavaret e servij arc'hant ann offeren-
« nou ag ar zacramantchou da repara ann ilizou ; peur-
« liessa ann arc'hant-se na zervij nemet evit uzaj ar re
« enn resev, rac reparasionou ann ilizou a zo assuret
« gant ar c'hestou ag offransou ann dud fidel. »

Red oa d'ann Iliz kaout eun arm evit delc'her he fouvoar. Kaout a reaz an arm-ze enn excommunicasion, ag goude er gonnession. E 1184, concil Veron a ordrenaz d'ann iskibien lakaat etre daouarn ar justiz ar re a refuze n'em gonnertissa. Ractal e savaz tribunaliou a hiz nevez hanvet tribunaliou ann Inquisition. Enn hano ann Inquisition, secret ar gonnession a oa bet toret, ag kals heretiket a berissaz e kreiz ar flammou.

Goude beza goloet eul loden vad deuz ann Europ a dan ag a woad, ispisial ar Spagn ag ann Itali, ann Inquisition

na gouezaz nemet dre daoliou ar Revolution, ag c'hoaz e oa guelec er Spagn deuz 1814 da 1820.

Ar veleien hirio pa vez goulennet ho avis digantho var Inquisition, a respont : *C'était une erreur de dogme.*

Eun errol ! mes neuze kement pap enn deuz renet deuz ann daouzekvet beteg ann naontecvet kanvet ne oant ket « infallible » evel Pie IX ?

Eun dra zo dreist oll enn histor ag na hell ket beza kuzet : Maro Jeanne d'Arc.

Ar plac'h iaouanck kalonnek-se e d'oa eur feiz vad ha kre, ag koulskoude e z'eo bet devet e beo evel eur sorse-rez. Ann Iliz a gondaonaz anezhi, dre hinou arc'heskop Beauvais, unan deuz ar re a n'em hanv vikelet Jesus-Krist var ann douar !

Ag hirio ar memes Iliz e deuz c'hoant d'ober eur zantez deuz Jeanne d'Arc !

Nan, lezit ar plac'h iaouank-se da repozi e peoc'h enn he gloar immortal, n'he deuz ket ezomm deuz ho curu-nennou !

Hep dale e velfomp beleien Breiz o sevel adarre evit ann elecsionou. Poueza a reint kals var sperejou aounik ar bayzantet. Mes ni a hello combati enn eur sklerijenna ann dud.

Digass a refomp da zonj hepken penaoz ar veleien a dle doujanz d'al lezennou evel ann dud all, ag ho deuz tor da nem glemm deuz ann droajou lakeat var ho danvez, rac e nosvez ar 4 a viz eost 1789, enn deuz, evel ann noblonz, renonset d'he brivileachou. Abaoue n'euz ken nemet eur rumm dud e Franz, ag ar rumm dud-se a dle heullia ann diviz-ma : ingalite dirag al lezenn.

Eur Mignon d'ar Wizionez.



7898